




Ar Bleun-Brug a vo : e Plougastell-Daoulas d'ar 14 a viz Even,
e Langonned, d'an 21 a viz Even, e Elliant d'ar 5 a viz Gouere,

Eno c'hwi 'gavo da 'falhad
Levenez kristen ha breizad.

BLEUN-BRUG

Niv. 117 (Mizieg-Mensuel)
Koumanant - Abonnement : 500 fr.

MEURZ-EBREL 1959

TAOLIT EVEZ MAD

Kasit 500 lur (600 lur kour. a enor — 1.000 lur kour. madoberour) da :

Bleun-Brug, 21, rue Jos. Doury, Nantes.

C. C. P. 1541.90 Nantes.

Kas ar skridou da : **Abbé Bleunven, curé Saint-Renan (Fin.).**
Mar fell deoh beza ezel euz ar Bleun-Brug pe rei deom skoazell, kasit ho skodenn da :

V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin, Finist.

C. C. P. 544.22 Nantes

Ezel : 500 lur. — Madoberour : 1.000 lur.

TAOLENN

Da heul Or Zalver	1
Mouez reier Plougastell (D ^r Dujardin)	2
E Bro-Laos (eur Breizad)	3
Et da laer (Mab an Dig)	7
Ar hog hag al louarn (H. Loran)	9
Keleier	10
Teñzor ar brezoneg beo (V. F.)	14
Distro ar prizonier (Y. ar Gow)	16
Skol Sant-Drén	17

Klevit 'ta !

Kalz a nehamant on-eus bet on-unan, o veza m'eo bet erruet ganeoh, ken diwezad all, an niverenn ziweza, a dlefe beza bet deuet euz ar vask e penn kenta miz C'hwevrer. Ho pedi a reom d'on diganezi. Gwelloh a raim en amzer da zond.

Gweled a rit avad, e talvez bremañ peb niverenn evid daou viz. Abaoe pevar bloaz eo kresket priz ar moulla euz an hanter. Or houmananterien n'eo ket kresket o niver. Ma teu re nevez e varv re all. Ar priz ken nebeud n'eo ket bet kresket, setu m'on eus renket ober diouz an arhant, ha moulla nebeuloh a niverennou er bloaz, da hortoaz amzer welloh. Kement-se ne viro ket ouzoh da jom feal d'ho kelaouenn.

Prenit raktal !

La vie de l'**Abbé Pierre-Marie Lec'hvien** (1885-1944), skrivet gand an aotrou Poisson, 128 pajenn : 660 lur (franco).

An aotrou Lec'hvien, person Kemper-Gwezenneg (C.-du-N.), a oa diskibl ha mignon braz d'an ao. Perrot. Eveldan eo bet merzeriet e fin ar brezel diweza, war zouar e barrez.

Skriva d'an oberour, **22, rue St-Louis, Rennes. C.C.P. 83.07 Rennes.**



133866

Da heul or Zalver

Ar gristenien wella a vez nehet a-wechou, o klask gouzoud peseurt hent kemer : chom heb poania nemeur evid gwellaad stad an dud war an douar, ha beza darbareet nemed gand traou an ene ? Peotramant poania da rei êzamant-buhez d'an dud, e ser digeri muioh-mui o halonou d'ar feiz ?

Eaz eo kompren e tle an abostol kemered preder gand stad a vuhez e vreudeur er bed-mañ ; n'eo ket hebkén evid beza gwelet mad, med evid pouezusoh abeg.

Ar bed-mañ ha kement a zo ennañ, an den ha kement a zo en e zer, a zo krouet gand Doue ; kaoud disprij evito a zo ofañsi Doue. Ouspenn, an den e-neus d'en em zantellaad e ser doareou e stad a vuhez ; lod doareou a zo êsoh beza kristen ganto, lod all diêsoh : mad eo eta poania d'o urzia, hervez an Aviel. Arabad e vefe avad chom war ar bazenn-ze : sklerijenn an Aviel a rank beza embannet war-eeun.

Deom adarre d'ar skol gand Or Zalver Jezuz-Krist.

Ne jom ket dizeblant dirag buhez an dud hag o zrubuilhou. Truez e-neus ouz ar vaouez kêz o ouela d'he mab unik. Meuli a ra an intañvez paour a laka he 'frof e kef an Templ. Plijoud a ra gantañ kaoud bugale en dro dezañ.

Ha labour ar wazed : gouzoud a ra peur ema mare ar gounidou ; gouzoud a ra e sav louzeier fall e-taez an ed mad ; e vez pounner ha skuizuz samm al labour en hañv. N'ema ket heb anaoud ar pesketêrêz, poaniou ar vartoloded hag ar riskl eo o hini. Plijoud a ra gantañ goulenn kelou euz o labour, o gounidêgêz : « **Daoust ha paket ho peus pesked ?** » emezañ dezo diwar an aot... hag e lavar dezo e 'pe du teuler o rouejou.

Ha labouriou humbl ar merhed en ti. Gweled a reom en e barabolen-nou ar vaouez o penseliad eur pezh dilhad uzet, pe o veska goell ha bleud evid lakaad an toaz e gê. Na pell diouz an dud, na dizeblant en o heñver, Jezuz, er hontrol, a ziskouez beza tomm outo ha kemer soursi ganto.

N'eo ket hebken dre gomzou ; dond a ra war zikour an dud ankeniet. Digemer vad a ra d'ar re glañv... Truez e-neus ouz an engroez tud deuet d'e heul, ha chomet heb tamm ; ar re-mañ n'o-deus na lavaret, na goulennet netra, ha Jezuz a zo dija darbareet o klask peadra dezo da zibri. Ano a zo gantañ ivez euz an dud dilabour en unan euz e barabolen-nou : « **N'on-eus ket kavet a labour hirio** ». Nann, ne jom ket dizeblant dirag poaniou ha trubuilhou an dud.

Ar pezh a gont evitañ, avad, araog peb tra, eo ar vuhez eternal ; heb ehan e tigas da zoñj eo an dra-ze ar penn-kenta : « **Petra zervijfe d'an den gounid ar bed a-bez ma teufe dezañ koll e ene ?** ». Brasa merk a garantez a heller da rei d'eun den eo sikour anezañ da veza gwelloh, e zikour da dostaad ouz Doue, da hounid ar vuhez eternal...

Jezuz a oar priz madou ar bed-mañ ; gouzoud a ra ive n'int ket ar pezh a zo a wella, hag eo diêz ober uzaj vad anezo. « **Klaskit da genta Rouantelez Doue.** » Gwir eo e komañs Rouantelez Doue er bed-mañ ; klask Rouantelez Doue a zo poania evid diazeza ar justis en darempredou etre an dud, ar peoh etre ar poblou, lezenn Doue er halonou. Med ar Rouantelez-se ne vo diazezet da vad nemed diwezatoh en eternite. Eno ema ar gwir vro ha setu perag, derhent e Basion, Jezuz a bed e Dad evelhenn : « **Tad, goulenn a ran diganez ma teufent int-i ive, eun dervez, d'al leh m'emaon o vond...** ».

(Lizer a Bastor an Ao'n Eskob FAUVEL.)

Mouez reier Plougastel

« Piou n'e-neus, en eur dremen e-keñver Plougastell,
« War beg douar ar vro-ze, gwechou taolet eur zell,
« Evid gweled ar herreg, peulvaned grêt gand mein,
« Savet ganto en neñvou linenn rouzet o hein »... (1).

Pebez foto kaer am-eus gwelet, en deiz all, e Plougastell ! foto skol ar merhed e Sant-Adrian (2). Hanterkant vloaz da nebeuta eo ar foto-ze. Gand mestrezed ar skol ez eus warni c'hweh renkennad merhedigou, gwisket oll en o haerra, ma 'z eo eun dudi selled ouz al liorzad bleuniou e seblant beza, daoust ma ne veze ket greet, en amzer-ze, fotoiou a liou.

Kinnig a ran e vije, war leurenn ar Bleun-Brug, deiz ar Gouel braz a vo lidet e Plougastell d'ar 14 a Vezeven, renket oll vugale ar barrez, paotred ha merhed, ganto o braoa dilhad ha pedet fotografed a vicher a beb bro da zond da denna o 'foltred a liou.

Mad e ve ive boda ar merhed a zo war foto Sant-Adrian, dezo eun tamm oad bremañ. Ped anezo a zo beo ?

Sur oun n'o deus ket ankounac'heet ar merhed santel a ree skol dezo. Daoust dezo da zeski d'ar vugale katekiz brezoneg ha galleg, oh implija brezoneg, reputet e veze Sant-Adrian da rei deskadurez koulz ha gwelloh zoken eged forz peseurt skol all. Klevet am-eus lavared ne gave enseller ar skoliour rebech ebet da ober, rag diouz ar frouez e vez barnet ar wezenn.

Gwir eo ema ar wezenn e Plougastell, he gwriziu sanket don en eun douar santel. Abaoe pegeid eo kristenet ? Mil bloaz a zo. Mil bloaz all araog, c'hoaz, paotred ar vein-hir hag an taoliou-mên a veve war ar horn-douar. Ar Romaned a zeuas war o lerh. O roudou a zo merket war an anoiou : Keroumen, Treastell, Cosquer.

Ha roudou ar zent ? C'hweh kordennad a zo er barrez, med eiz chapel, ar pezh a zo rouez, e Breiz zoken, e-leh ma n'eo ket piz kouskoude ar Vretoned gand o japeliou. Plougastelliz a zo bet brokuz : I.-V. ar 'Feunteun Wenn, Sant Adrian, Sant Glaoda, Sant Gwenole, Sant Langiz, Sant Tremeur, Sant Yann, Santez Kristina, hag eveljust feunteuniou all ouspenn : Sant Riwal, Sant Per, Sant Abraham, Sant Benead. Ne gredan ket beza deut a-benn da houzoud ped skeudenn sant ha santez a zo e peb korn ar barrez : a zegou ez eus anezo.

Hag eveljust eur japel eur pardon, eur pardon eur hantik. Hini sant Gwennole, sant braz ar barrez (sant Per ha sant Paol a zo patroned iliz Plougastell), hini sant Adrian (hag a zo patron Santeg ive), hini I.-V. ar 'Feunteun Wenn, kantikou santez Kristina, hag an tri en enor da zant Glaoda a zo bet savet gand an aotrou Y.M.F. (Fagot) bet kure e Plougastell. 1885 a zoug kantik santez Kristina.

Kantik I.-V. ar Zalett a zo diwar dorn an aotr. Kersale, a gredan, bet aomnier Salett Montroulez, ha brezoneger euz an dibab.

Gand kantik sant Yann ouspenn, hag istor burzuduz santez Trifina hag he mab Tremeur, ez eus peadra da gana e-pad pelerinaj hir ha skuizuz an neb a yafe war droad da bedi e peb chapel euz Plougastell.

Tarda 'hellfe da ziskuiza e-harz peb kalvar a gavfe war e hent rag bez' ez eus anezo ! Eun tamm mad a ziskuiz a gemerfe o klask niveri skeudennou kalvar braz Plougastell, brudet er bed-a-bez, hag o tibuna ar geriou kizellet war japel Sant-Adrian :

(1) Tennet euz leor Glaoda 'r Prad « Mouez reier Plougastell ».

(2) Gwetit ar skeudenn-ze war golo diweza ar gelaouenn.

EN BLOAZ MIL PEMP CANT HANTER CANT NEMET UNAN EZ VOE FONTET AN
CHAPEL MAN EN EIL SUL E MAE EN AMSER MAESTR HERRY A CASTELL
RECTOR PLOEGASTELL HA IAHAN GVERGOZ DIT MONOT GOVERNER EN CHAPEL
MA EN ENOR DA DOE HA YTRO MARIA A COFORT HA SANCT ADRIAN

N'eus ket kalz geriou brezoneg kosoh ha ken niveruz kizellet e Breiz. D'ar Vretoned ol, da Blougastelliz dreist oll e roont da zont emaint o chom en eur vro bet kristenet gand tud euz o gouenn e yez o zadou.

N'o-deus ket ankounac'heet eur seurt kentel, p'o-deus laket kizella war montumant o henvroiz maro er brezel : « Parrez Plougastell d'he bugale maro evid ar vro ».

Abaoe avad, n'am-eus kavet a vrezoneg, oh ober tro ar barrez, nemed ar geriou-mañ, er vered : « Dale'homp sonj » med pegen kenteliuz !

Dalhith sonj euz skoueriou mad ar zent, patroned ho parrez, euz kenteliou bet roet amañ gand ar veleien a renas Plougastell. Daou anezo a zo tostoh da galon ar Bleun-Brug eged ar re all : an aotr. Cardinal hag an aotr. Uguen.

An aotr. Cardinal a zo bet person Sant-Nouga. E-pad m'oa person eno e oe roet dezañ da gure an aotrou Perrot, tad ar Bleun-Brug. Bez' o-doa o-gaou renet ar gelaouenn FEIZ HA BREIZ hag eur helh : « Paotred Sant Nouga ». N'oa ar helh nemed tri bloaz pa oent galvet da zond da Blougastell da rei eun abadenn c'hoariva e-pad goueliou hañv Kevredigez Broadel Breiz. E 1908 oa. Displeget e oe ganto, e Sant-Glaoda, dirag tri mil den bennag, an daou bez c'hoari : an Aotrou Keriold hag ar C'horriganed.

N'eo ket niveruz, a gredan, ar re a oa eno en devez-se hag a vezo o selaou ar Bleun-Brug er Hleger deiz goueliou braz ar 14 a viz Mezeven. Muioh a zo o kaoud sonj euz lidou Bleun-Brug Plougastell da viz Eost 1937 ; lidou war ton braz e peb doare, ma padas an hekleo anezo eur pennad amzer gand ar hazetennou. An hekleo-ze a lavare : « Lakaad eur bern Bretoned d'en em glevet a zo ken diêz da ober ha divruga Menez Are ».

Warlerh an aotr. Cardinal, da viz Gouere 1928, e oe anvet an aotr. Uguen da berson e Plougastell. N'oa ket tardet c'hoaz hekleo Bleun-Brug Plougastell, pa varvas. Diskaret e oa bet gand ar hleñved eur pennad a-raog ar goueliou.

Eur ranngalon e oe ar helou d'ar Vretoned, rag sonj o-doa enori ar Breizad kaloneg a oa anezañ hag ar skrivagner ha n'oa ket dreist dezañ, e brezoneg. Nag a leoriou bet savet gantañ ! Buez Mikael an Noblet, Buez an Tad Maner, Imitation Jezuz-Krist (3), Aviel ar Zul, etc... (4), dreist-holl eul Leor Overenn hag ar Gousperou a dlefe beza e peb ti, rag n'eus leor overenn all ebet ken brao hag e hini.

Allaz ! ar bed a dro, a dro buan ; ar pennou a dro buannoh c'hoaz. Dre drei ken buan, e seblant an empenn mond kuit euz ar grogenn. Pegeid e pado an abadenn ? pegeid e vo nahet an dud a zo bet hag o oberou ? tud hag oberou fur eveljust. O telher dezo, dre garantez evid ar Feiz hag evid Breiz hag evid eürusted ar Vretoned, ar Bleun-Brug a reket, war eun dro, e vo greet peb tra evid gwellaad stad o henvroiz dre rei dezo : heñchou, elektrisite, dour, tiez nevez, dreset an tiez koz, da laouenaad o buhez pemdezieg. War zouar santel Plougastell.

L. Lok.

— En eur ober tro ar chapelioù on-eus bet tro da weled pegen brao eo bet nevez renket chapel San Yann war lez ar Ster-Elorn : eur braoig, e gwirionez, en eun neiz a hlaester. Meuleudi d'an aotrou Mâr ha d'e guzulierien.

(3) Bet moulet 20.000 skouerenn anezl.

(4) Buez al leanezig Mari-Lusi, Itron Varia ar Zalett, Gwirioneziou war an odivi, Kenteliou Person Ars, Buez Jeann d'Ark, Buhez Hor Zalver Jezuz-Krist, Buez Viktoria Konen a Zant Luk.

E BRO - LAOS

Tud 'zo hag a lavar e vo bremaig re a dud o veva war an douar ha ne vo ket kavet boued awalh d'o maga oll. Hama ! N'ema ket hoaz ar stal evel-se gand Bro-Laos. Wardro seiz pe eiz gwech brasoh eged Breiz e hell beza ar vro-se ha n'eus ket marteze daou vilion a dud o veva enni. Eur vro iskiz e meur a geñver eo, iskiz ha dedennuz ivez.

An neb a loh diouz Saigon dre garr-nij evid mond da Vientian, kêrbenn gouarnamant al Laos, goude beza nijet a-zioh delta ar Mekong hag a rizegi (1), goude beza nijet epad eur pennad a-uz d'eun tamm euz ar Hambodj, ne wel nemed koajou diñdannañ koulz lavaroud beteg Vientian.

Ha p'en em gaver a-uz da Vientian e kav d'ar beajour e wel dindanañ a-hed ar Mekong eul liorz braz braz gand kalz gvez, alezou kronnec ha tiez strewet drezañ. Eun dro izelloh-izela a-uz da zoureier ehon ar Makong, peadra sponta eun disterra ar veajourien, hag e teu ar harr-nij d'an douar. P'en em gaver e kêr avad eh en em zanter un tammig dizouezet: ar strêdou ne vezont ket dalhet a-ra're kaer. E meur a leh e vez lezet an atredou war vord ar strêdou pe e kichenig an dour. Al liorzou hag a zebante ken koant, gwelet euz an neh, a vez lezet al louzeier da boulza enno evel ma teuont en darn vuia anezo, ha n'eo ket c'hwez ar bleuniou a zanter gand an êr, dreist-oll pa dremener dre garter ar hohu. Koulzoude bez ez eus bandennou laboused preiz begel kaled hag en em intent mad awalh da skarza loustoniou kêr. Marteze bremañ avad eo bet gwellêt an traou hag ez eo ken plijuz kêr Vientian evid an den a bourmen war droad hag evid an hini a zell outi diouz eur harr-nij.

Luang-Prabang, kêrbenn ar roue, paket etre ar Mekong hag eur ster ledan a gas he dour dezañ, a zo kalz koantoh ha nêtoh da weloud. Araog douara e Vientian e nijer tostig tost d'an dour. E Luang-Prabang avad eo e kichenig ar menezioù e troideller a-barz mond d'an douar. Gwelloh eo kaoud fiziañs e levier ar harr-nij ! Eun dro e kêr o tremen dirag palez ar roue, o pignad d'ar Phou-Si, o tiskenn goude-ze gand an diri brikennou beteg ar palez, an diri-se ma vez, da geñver gouelioù 'zo, merc'hed o tiskenn en noz en eur zañsal goustad, flambézennoù en o daouarn. Ar pagodennou a zo ken niveruz pe dost hag an tiez, war e hellfed kredi. Nê eo ar strêdou, glaz eo ar glazvez, an êr n'eus flêr ebed gantañ, ar menezioù a zo tost ha sklêrig e seblant an dour. Eur gêr blijuz.

Plijuz ivez eo an dud ha n'eo ket hebken e Luang-Prabang. Seven braz int ha tuet da zegemer mad an oll, koulz tud ar vro hag estrenien. E peb ti, koulz lavaroud, ez eus eur pondalez dindan an doenn ma hell, hervez ar hiz, mond forz peseurt beajour da dremen ennañ an noz, ma kar. An diduamant a blij d'al Laoed, ha mailhed int da aoza gouelioù. Ha meur a wech ar bloaz e kavont tro da ziskuiza ha lida gouel pe houel. Bez ez eus ar gouelioù lao, a zo stank ; hag ouzpenn-se darn euz ar gouelioù europad pe Vietnamad a zegas ganto eun devez ehan-labour. Ar hoarivaou (2) ha sinemaou a vez digor hogos bemdeiz ha ne jomont ket goulo. Tud ar vro ne vezont ket gwelet a-liez o redez: amzer 'zo ! Ne houlennont ket kalz a dra da veva kennebeud : eun ti savet gand koad, pri, palmez ha setu m'int goudoret awalh. Riz, frouez, pesked, eun tamm kig eur wech an amzer, ha kavoud a reont o-deus bet o gwall a voued. Gand seurt ezommou n'eo ket souezuz e vefe nebeud a dachennou gounezet hag e vefe chomet ehon braz ar hoadegou. Gwir eo ez eus lehiou heb dour epad eun tamm mad euz ar bloaz, e kreizteiz ar vro. Koulzoude, kalz lehiou goloet gand gwez a-hed ar stêrioù a vefe gellet moarvad o difraosta ha lakaad drevajou da ziwan warno.

(1) Rizegi : parkajour rizi.
(2) C'hoarivaou : théâtres.

Hogen estegred laoed a zo o chom el Laos. Kalzig Sinaiz, muioh hoaz Viet-namiz, oll kenwerzourien war bouez nebeud, a zo deuet d'ober o annez er vro. Bez ez eus ivez tud ar menezioù : Meo-ed, Khaed ha re all. Ar re-ze a vev e kêriadennou kludet war ar menezioù e-touez ar hoajou ; maga a reont chatal munud, a-wechou kezeg bihan, gounid legumaj hag opiom. A vare da vare e lakeont an tan en eur pastell koajou ha, pa vez yenêt al ludu, diskaret ar hefiou a jome, e piketont riz etre ar sochou chomet en douar. Goude beza tennet diouz an dachenn-ze ar muia posubl a zrevajou, gounezet an dachenn-ze epad tri bloaz bennag, e vez paourêt an douar, disterroh an drevajou, dilezet e vez hag e vez faolet an tan en eur pastell koad all.

Epad pell amzer e oa meur a rouantelez vihan el Laos ha n'eo ket unan nepken. Ne oa ket didrabas atao buhez al Laoed rag ouspenn eur wech e oe aloubet tamm pe damm euz o bro gand bandennou soudarded deuet diouz ar Siam pe diouz Bro-Sina. Tiez a veze devet ha tud kaset gand ar zoudarded-se pa guitaent ar vro da zistrei d'o hini. Bez ez eus en amzer vremañ kalz Laoed hag a vev en Tailand (Siam), degaset m'eo bet eno a hentadou en doare-se. Wardro deg bloaz ha tri ugent 'zo e oe lakêt rouanteleziou al Laos dindan gwarez Bro-Hall. Eur Breizad, Aogust Pavié, a vevas meur a vloaz er vro, a studias e zoareoù, a labouras kalz da zikour al Laos d'en em zivenn ha goude d'he liamma ouz Bro-Hall. A-nebeudou e oe unanet kenetrezo ar rouanteleziou bihan d'ober ganto unan vraz gand Roue Luang-Prabang o ren warni.

Deg vloaz bennag 'zo e oe roet he 'frankiz d'al Laos. Chomet eo ar vro « e framm an Unvaniez Hall ». Arabad kredi e vefe faos ar frankiz-se rag e gwirionez Bro-Laos a gas kannadourien d'ar broioù estren evel ma kar, eun arme dezi he-deus ha kempennet e vez aferioù diabarz ar vro evel ma kav mad tud ar gouarnamant.

Pa oe lakêt an ehan-brezel er Viet-Nam ne oe ket peurheñvel an traou el Laos. Dizunvaniez a jomas er vro, kostezenn ar pateth Lao o terhel diou broviñs euz ar vro hag o tivenn ouz tud e karg ar roue da antreal enno. Krogadou a oe a-wechou etre arme ar roue hag hini ar Pateth.

Bez ez eus avad kudenn an darempredou gand darn euz an amezeien. A bouez eo. Bez ez eus Bro-Siam he n'ema ket pell, ha miret he frankiz ganti atao. Emeur o sevel eun hent-houarn a stago Bangkok, kêrbenn ar Siam, ouz eur gêrig war ar Mekong nepell diouz Vien-Tian, Marteze eo echu bremañ. Ha gand an nerz hag ar binvidigez a welont er Siam (pe Thailand) e vez dedennet meur a Lao.

Hogen bez ez eus Bro-Sina hag a zo tost ivez hag er vro-se ema provins ar Yunnan hag a zo poblet gand tud a ouenn Thai. Dres evel Bro-Laos hag eun tamm braz euz Thailand. Ha kaoz a vez a-wechou euz eur stad braz ma vefe bodet enni an oll Thaid. Kevredet e vefe ar vro-se ouz Bro-Sina hag evel-se, eur wech lonket Laos ha Siam e hellfe mond galloud ar gomunistiez beteg meurvor Indez ha ledenez Malaka. Da gredi eo ne blij ket ar mennad-se da houarnamantou Laos ha Thailand.

N'euz ket pell, beaji ne veze ket êz braz el Laos. Amzer e oa red kaoud rag hent-houarn ebed ne gaved er vro nemed eul linenn « Dekauville » o vond euz an eil tu d'egile d'eul lammdour war ar Mekong evid kas ar varhadourez euz eun eil hag d'eben. An hentou braz e oa nebeud anezo ha ne oant ket bet gwellêt tamm ebed gand an eiz bloaz brezel. Kalz anezo a oa bet goloe, a-hed meur a kilometr, gand brouskoajou ha strouez a beb seurt. Beh bloaz goude mare ar glaveier, labourioù braz a dlee beza kaset da benn evid lakaad adarre eunn nebeud hentou a-ratre.

An hentou gwella a oa ar stêriou ha pirogennoù ha gobiri a zervije hag a zervij hoaz kenañ da zougata tud ha marhadourez.

Abaoe eun nebeud bloaveziou eur wellaenn vraz a zo bet degaset en dougata gand implij stankoh-stanka ar hirri-nij. Ouzpenn al linennou braz o liamma Vien-Tian ouz Saigon ha Bangkok, kalz linennou bihan a zo bet savet ive. Gand ar stank hag ar serz m'eo ar menezioù el Laos, chañsou bras 'zo e vo implijet kenañ hebdale ar hirri-nij munud hag an troellou-nij (1). A-walth dezo eun tammig tachenn kompez da zouara, kuit a roudegou 1.500 metr pe ouzpenn. Ganto e hello mond ha dond êsoh an dud e karg, ar varhadourien, ar visionerien ma vez brokuz a-walh en o heñver an dud fidel. Ganto e hello beza kaset difrae ar glañvourien d'an nebeud ospitalioù a zo er vro. Nebeutoh nebeuta e vo kaset ar re glañv a-hed devezioù leun gand pirogennoù o tiskenn gorreg gand dour ar stêriou. Hag evel-se meur a vuhez a vo saveteet.

Boudhaiz eo an darn vuia euz an dud o chom el Laos. Hervez ar honstitution e rank ar Roue beza eur Boudhaad mad ha leun e vez ar hêriou a voñzed o vale goustad, touzel rez o bleo hag a obrantou, gwisket gand sêou melen ha gou-doret aliez gand eun disheolier ledan. Diouz ar beure e vezont gwelet o vond a regennadoù dre ar ruiou oh ober kest o boued ha, dirag peb ti, koulz lavaroud, merhed daoulinet a ziskarg dezo en o hokennoù frouez, riz ha bouedou all. Kelennet e vez an darn vuia euz ar vugale gand ar voñzed ha boaz e vez meur a waz da dremen miziou pad ha zoken bloaveziou euz o buhez o veva gand ar voñzed, gwisket evelto ha touzet evelto.

Ar misionou katolik a zo fiziet en Obladed Mari Dinamm, kalz Kanadianed en o zouez, en hanternoz ar vro. Kreizteiz ar vro a zo tachenn labour Tadou ar Misionou Estren, war a gredan. Nebeud a Laoned a zo deuet da veza katolik hogen abaoe eun nebeud bloaveziou kalzig menezidi o-deus degemeret ar gwir feiz. Bez ez eus ivez kalzig Vietnamiz katolik a zo deuet er vro, peurliesia evid ober-kenwerz. Obladed Mari Dinamm a zo o sevel eur hloerdi en eur gêr vihan war ribl ar Mekong : eun esper skeduz evid dazont ar vro !

Kavet e vez misionerien breton. Soñj am-eus beza et da weloud unan anezo eur zul heure en e gêriadenn. Bihan e oa ar japel, gwintet a-uz d'an douar war bostou koad. Gand skourrou plansonet e oa grêt ar mogerioù ha gand palmez an doenn. Ouz ar mogerioù e oa bet staget skeudennou devot. Ne oa ket kalz tud euz ar vro en overenn : pemp pe hwec'h marteze. Nepell ahano, en eul hiorz braz labourer kempenn, edo lochenn an Tad, disterroh hoaz eged ar japel. Eno e vev e o labourad seder, pasiant hag hael da zegas ar wirionez da dud ar vro.

Soñj am-eus ivez euz eur misioner breizad all o tiskenn diouz ar menez a-hed pevar ugent kilometr da zegas d'ar medisin tosta un den gwall daget gand eur hleñved grevuz. Deuet e oa gantañ eur vandenn Meoled euz e gêriadenenn ha douget o-doa a-hed meur a zeg kilometr ar hlañvour war eur hravaz a-dreuz ar hoajou, ar strouez, an diribinou serz.

P'en em gaver gand seurt tud e santer anad pegen droch ha foll eo klemm ablamour « *e houlenn atao arhant ar veleien* » pe lavaroud ez eo eur holl amzer mond da aviela ar re n'int ket katolik. Keuz en-devezer da veza chomet heb sikour awall ar visionerien kuitet ganto o bro da skigna an Aviel hag o terhel d'henn ober. daoust d'o buhez paour ha tenn, daoust d'an nebeud a skoazell a zegasom dezo, daoust da aheurtêrez kalz euz ar baianed.

N'eo ket al Laos eur vro gallouduz ha diazezet stard kenañ evid hoaz ha risklou 'zo e vefe staget e doare pe zoare ouz Sina pe Thailand. Hogen, dre o douser, o zevended, o doareou hegarad, meritoud a ra al Laoed beva eüruz ha degemer sklerijenn ar feiz.

Eur Breizad.

(1) Hélicoptères.

ET DA LAER

gand Mab an Dig.

(Kendalh)

III. — War ar vicher.

Evel en eur brosesion, goude al laou, e teue ar gernez hag an naon.

An naon ! Soñj am-eus, pa oan bihan, tonton Job a gonte din e-noa debret rabez en Almagn. An dour a deue e va daoulagad.

Rabez ! Rabez ! A ! m'on-dije bet rabez p'edom astennet, o klask menea an nebeuta ma hellem, heb netra en oll, e-pad derveziou ha derveziou ! Unan a gavas eun deiz eun dorz-vara deuet den ne ouie a beleh, hel lonkas, hag a varvas kerkent. Re all a yee evel ar zaout da beuri glazvez breset, leun-bri !

Klask a reen kousked. Ne reem nemed moredi, hag e tihunem evel a lamm, rag, en on huñvre, bepred e welem traou da zebri, n'eo ket traou dister, aozet mad, war blajou kaer..., nann, ar podad a roer d'ar moh en tiegeziou, ar gwelienn. Ni gave deom en on terzienn edo dirazom ar pod braz hag e sailhem warnañ, digor or hrabanou, or ginou. Allaz ! netra ! Ha m'on-dije gellet kacud da vihana restachou ar moh leun o hov ! Lipet on-dije gand plijadur o laouer !

Adarre edo o tond en-dro an naon spontuz !

Biel ! Biel ! Daou a houlenner da vond da labourad hed an deiz en eun tiegez. Deom ! Da denna patatez e oem kaset. An dud n'oant ket re fall. Ni on-daou on-oa lakeet doun en or penn ne rafem morse evid bro an enebourien nemed an nebeuta ma hellfem.

— An êr a zo yah ha fresk er parheier, Job. Ma karfem, gweled a rez, e rafem evel kement a re all a hedo, sioul en eun tiegez amañ, ma vo fin d'an abadenn.

— Nann, biken ! eme Job. Ni, Biel, a zo eet da laer, soñj az-peus. Or mieher : freuza, dihagni, atao pa hellim; gand ar pezh a gavim. Ol labour : kenderhel a beb hent an emgann !

— Ya, Job, hag henn ober a raim. Med, pa vo echu an abadenn, nag a freuz a zavo adarre. Leun a dud, Job, a gav dezo eo o dever ober ar pezh a reont, ya, zoken etre ar re a labour gand an Almanted, amañ hag en or bro. Kollet eo or hagou e kreiz ar mor, en deñvalijenn. Eleh chom unanet, peb hini a ya diouz e du hag a gav dezañ e ra mad. Goude an dra-mañ e vo red ankounac'haad peb tra. Hag an dud a goustiañs, an dud a gar o bro, a diefe dezo oll en em unani stard, en despet d'o menozioù disheñvel, gand eur pal, unan hebken : adsevel an dismantrou, ober eur vro nevez.

Ar pardaez a oa deut hag edom atao er park.

« Poent disternia », eme Job. Ne weled mui ar patatez ; ar zahadou a oa da zamma. Goude e oem koaniet.

— Bremañ e hellit mond d'ar gêr », eme an ozah.

— E giz-se ! eme din Job. En or bro-ni e vez pèet ar re a vez diouz an deiz. Alato ! Gal ! Evez, va 'faotr-me ! »

Job a lammas kuit. Teo oa e vruched en eur zizrei.

— Greet ar stal ganto, hag unan ! Daou daol kontell, hag edont dihou-zouget, an daou gilhog !

Ganin-me e oa eur zahadig mad a batatez.

Er japel e oa aozet ar ragod. En deiz-se, Job ha me on-oa leun a gamaladed.

Daou pe dri dervez da houde, Job ha me a oe harluet ahano, ablamour m'oam pennou fall, netra d'ober ganeom. Eur hamalad on-oa, eur 'fuzuilh gantañ war e gein. Ni a valeas pell ha pell, heb gelloud diskuiza. Kaset e oem, da beleh ? d'eur gouent, leanezed ennañ. Pev ar pe bemp all a oa eno, tud sioul kenañ.

— Amañ, emezo, eo brao beza. Al labour n'eo ket tenn, hag al leanezed a zo chentil kenañ.

— Petra zo da laerez ? eme Job.

— Da laerez ? eme egile nehet. Peadra on-eus da zibri, ha ne laerom netra. Ni a lavaras da baotr ar 'fuzuilh ne blij e ket deom an ti-ze.

— Mad, emezañ ; neuze ez aim pelloh.

Klasket em-eus kompren meur a dro abaoe penaoz an diaoul e oem iezet evel-se da zibaba koulz lavared an ti a blijfe deom. N'eus ket kalz hag a ve en em gavet ganto eur seurt tra : peb hini a veze taolet en e gorn-tro, hag a zizroe dezañ, ma kerze d'en em glemm, gand eun taol botezenn en e ziadreñv.

Ni gand or hanfart a oa renet euz eur gêr d'eben, euz eur vagajenn d'eun uzin. War-nez chom oam bet en unan : rag kavet on-oa laeron evel dom. O tond edont euz a laerez eur vloh, med re a labour a oa d'ober. Ni a gendalhas gand on hent.

Eun deiz oa goullor or hov : paotr ar 'fuzuilh a dliz dezañ skuiza. Droug a oa ennañ hag e hargouilhe deom resperdadennou na gomprenen ket eur hagnad enno. Ni a yeas da hourvez e toull ar hae da hedall an tren.

P'oa troet e gein gand ar paotr, eur vaouez a dosteas, ha buan, a daolas deom beb a bakad bonbonou.

— Tud vad a zo amañ evel en or bro-ni, eme Job, an dour en e zaoulagad.

— Ya, Job. Ha ma hellfe an dud vad oll en em gleved, ne ve ket mui a vrezel. Med ar re 'fall a oar gand eun ijin dioualeg lakaad e penn ar re vad a heb seurt sorhennou evid o 'foulza d'en em ganna. I a c'hoarz a-dre-kein, ha pa vezint douaret, a redo da houllonder o godellou.

— Ne deot ket pelloh, eme deom paotr e 'fuzuilh.

Ni a oa en eun uzin, e-kichen kêr-Amberg. Moged du a zave euz ar four-neziou-uhel.

— Tenn ar vicher ! eme deom kamaladed. C'hwi a labour war an houarn ?

— War an houarn ? ni ? eme Job en eur skrabad e benn. Biken !

Kaset e oam d'eun tiig brao ha kempenn, leun a vekanikou a lügerne. Merhed yaouank gwisket e gwenn a rede war o zro.

— Amañ n'eus ken nemed merhed, eme Job, ha n'eo ket mez o gweled.

— Ro peoh, sell, setu eun aotrou.

An aotrou, klevit mad, a roas deom beb a blahig. Job ne houlennas ket petra oa da laerez !

Al labour n'oa ket tenn : lakaad da deuzi greunedigou houarn a douriou treñk a beb seurt. Amzer a oa da varvailhad ha ni a zeskas alamaneg d'ar red tan. Da nav eur or « fräulein » a ranne e daou he azlein, da beder eur, he avalou. Butun, a heb seurt madigou a zigasent deom ive, n'eo ket hebken o-diou, med ar re all o-doa avi ouz o diou gamaladez.

Beb an amzer ni a zirolle er gigèrèz a oa e-kichen. Ha leun or godellou a gig e kerzem d'her ranna etre or mignoned.

Ne badas ket pell or buhez aotrou. Eur pardaez, unan euz or hamaladed a bakas eur stavad gand eun Almant. Ne blij e ket deom en oll ar hamalad-se, eur brabanser, eur glabouser. Med n'oam ket evid gouzañv e ve skoet eur prizonier.

Job ha me a youhas, a gemennas e oa red dilezel al labour. Ar fuzulioù a strakas a-uz d'or penn. Kila ! Morse !

Merhedigou koant Amberg. Merhedigou heñvel ho kalon ouz hini merhedigou or bro, ho mouse'hoarz a zo deuet da lügerne en or buhez garo evel klerijenn c'hweg al loar e teñvalder skrijuz an noz ! Sklavourien oam, ganeom c'hwez ar fank, ha goullor or godell. Gand eur garantez dispar, tener, heb eur ger hag e-nije gelllet ober deom poan, c'hwi ho-peus gouezet rei deom nerz da zougen or hroaz, ha dreist-oll fiziañs e hello warhoaz bleunia ar peoh etre broioù enno kalonou ken dispar.

Ho taelou, merhedigou, a lakaas da deuzi ennom ar gasoni.

Doue r'ho pennigo, merhedigou Amberg, hirio mammou o hada karantez e kalon ho pugalgou !

(Da genderhel.)



ar hog hag al louarn

Gwintet war eur wèzenn-bin
eur Hilhog koz ha fin,
dous ha flour e vouezig
e tispake Alanig :

« Va breur, emezañ, sinet ar peoh,
ne vo ket mui greet brezel deoh.
Diskenn amañ ma pokin dit.
Diskenn dioustu, ma 'z in-me kuit,
rag ar helou am-eus da gas
da zeiteg pe driweh plas.

Hiviziken war dro kêr
e helli mond dibreder

da beuri,
da c'hoari,
'vel ma kari,
dizoursi !

Breudeur om. Ni ho tivenno
ha peoh a vo. »

« Na kaerra kelou ! 'mè ar Hog,
Ez an da rei deoh eur pok.
Sell 'ta ! Petra welan e penn ar prad ?

Daou bez ki o taoulammad,
sur a-walh, kannaded ar peoh,
gand ar helou zo deut ganeoh.
Diskenn a ran, ha war eun dro,
E raim eun taolig jabadao. »

« Kenavo, 'me al Louarn, 'm-eus ket amzer.
Labour 'm-eus c'hoaz d'am d'vesker
da gas ar helou da bell bro.
Kenavo ! »

Hag e strinkas evel eun tenn
er wenojenn.

Plad e lost, don e skouarn
evel an avel 'z ee al Louarn.
Dirollet Yannig da c'hoarzin
ken ma krene korv ha kribin :

« Trompla mestr ar gaou,
eur blijadur a-wechou ! »

H. LERAN.

keleier

Devez a vignoniezh Plabennec.

Eil devez a vignoniezh ar Bleun-Brug a zo bet greet e Plabennec d'an 22 a viz C'hwevrer, e skol al leanezed.

Renket mad e oa bet peb tra en a-raog gand an ao. Jos ar Gwenn, setu ma 'z eas an traoù dirouvenn a-hed an devez penn-da-benn.

Ouspenn kant a yaouankizou en em gavas eno euz Brest, Landern, Plougerne, Landivizio, Kastell-Paol, Miltrolez, Plouedern, Lokronan, Kemper...

An overenn a oe lavaret, e chapel ar skol, gand an ao. Job Seite, hag ar han kaset en-dro gand an ao. Abjean rener Kanerien-Leon. An ao. Gourmelon, iz-aluzenner B.B.-Leon, a reas ar breiz-genn, war eur gêr euz aviel ar zul-se : sul an transfiguration. Diskouez a reas pegen kaer eo, d'eur strollad re yaouank beza unanet evid pedi, studia ha c'hoari asamblez : pedi, evid ma vo enno graz Doue, studia evid dezo da anaoud gwelloc'h o relijion hag o bro, c'hoari evid lakaad da vleunia levezek kristen ha breizad.

An oll en em gavas goude da zelaou an Ao. Omnes o komz euz ar personachou marzuz e kontadennoù ar Vretoned : gwrahet, teuziou, boudiged, kornandoned, ramzed ha diaoulou. Eur breiz-genn blijuz displeget brao ha kavet re verr gand an oll.

Eun daol servichet mad gand al leanezed a zistagellas goude an teodou, hag a roas tro d'ar re yaouank d'en em anaoud gwelloc'h.

Da 14 eur hanter edo an oll adarn e sal ar prezegennou. Bernard de Parades a zisplegas pinvidigezioù touristikel or Breiz-Izel ha penaoz e hellfe ar helioù, bagadou ha lazou-kana lakaad or bro da veza plijusoc'h c'hoaz d'ar re a zeu d'ho gweled. Evid-se, e tle ar yaouankizou-se kared o bro, da genta, he anaoud mad, gouzoud he yez ha dougenn o dilhad breizad gand enor, doujañs ha dereadegezh... Eur gentel dalvouduz eo, bet ar gaozeadenn-se evid peb hini.

Evid divorflla an divesker, eun taol dañs ha biniou war ar porz, e-keid ha ma 'z eus re all o prena levrioù e stal ar Bleun-Brug.

Merenn-vihan a laka an dud adarre d'en em voda, ar marvailhou hag ar hanaouennou da vond en-dro. Ar vignoniezh, e gwirionezh, o vleunia.

An Ao. Gourmelon a zav neuze e vouez : Eur bennôz Doue c'hwég d'al leanezed ken hegarad, ha d'ar re oll o deus savet an devez-se.

Eur gêr ive euz Troveni Lokorn, a dle, d'an 12 a viz Gouere, boda yaouankizou or strolladoù breizeg, du-hont war ar menez, war roudou o zadou.

G. Pijon a glozas an devez en eur zigeri eun diviz etrezañ hag ar re yaouank diwarbenn ar Bleun-Brug. An oll a houlenn ma vo stankoh devezioù a vignoniezh ar Bleun-Brug, ma vo savet eur homité da zoursial euz ar gudenn-se. Goulenn a reer ive danempredou etre strolladoù Leon ha Kerne. Peb strollad a zibab unan euz e izili da veza ezel euz komite yaouankiz ar Bleun-Brug. Ar remañ a en em vod raktal, en o 'fart o unan, dindan renadur G. Pijon. — Eun devez a vignoniezh etre Leon ha Kerne, a vo greet e Lokronan e kerz an nevez-amzer, d'an 3 a viz Mae.

A-dreuz ar skolioù e Breiz-Izel.

Plijuz eo, a-dra-zur, mond, a-dreuz Breiz-Izel euz eur skol d'eben. Réd e vefe mond an unan da heul sekretour ar Bleun-Brug, evid kaoud eun tañva euz kement-se. Gantañ on-eus klevet meur a dra, ha lenn a reom ive al liziri hir a gas koulz lavared heb sizun da rener meur ar Bleun Brug, da rei da anaoud e labour.

En niverenn ziwez, on-eus skrivet amañ eo bet oh ober kaozeadennoù en oll skolioù danvez mistri ha mestrezed skol a zo e Breiz-Izel.

Eur skolladez, euz Kermaria-Lozmine, he deus bet kaset dezañ goude, al lizer-mañ :

« Brêr Ker,

« Trugêr e zo delê dom laret doh. Rah er peh e huez laret ha diskoet dom en des plijet mad dm. Namkoehem ket er halvarieu ken brañ e kreiz er lann pe, e korn ur park. Trugere eûd eid er voiaj e huez reit dom gober de Landevennec. Ne uêtem ket guêh erbed er hovan-sê guêl aveid disul, rag 'benn kant vîe ne veem ket kin, 'mêd hag e veem el diskiplêd Sant Guenolê. Kontant om bet eûe d'ober un tammig tro dre

Vreiz. Rak mar plij dom peh en des groet hun tadeu, en Eutru Doué en des groet brañoh. Ha melein e ram en talant hou pes laket de gemer photoieu ken brañ aveid hun lakaad de joetsein muioh.

« Bremen, ni e zihuennno berped, ged tuemder braz, hur Bro-Breiz. Ni e gano muioh e brhoneg ha ni e zesko er hanenneñ-se d'hur bugale. Ha pe hellem sekour genoh eid er Bleun-Brug ni e rei er peh e zo en hur motanted Reseñet, Brêr ker. anañdigeñ vad en oll studierezed a skoltaj Intron Varia Glan. »

Odette JICQUEL. » (20-1-59.)

Ouspenn, kanadig Seurezed Kermaria, e skrivas, da oll skolioù an Urz, eun danevell, euz prezegennou Visant Seite.

Goude beza danevellet an diou abadennoù-prezegenn a-hed diou hajennad, e skriv ar Hannadig kement-mañ, evid echui :

« ...On ne saurait tout décrire. La séance se termine par l'audition de deux chansons bretonnes interprétées par une petite fille et un petit garçon : « Al labousig bihan » et « Ar haz koad ». Un vœu monte à nos lèvres. Que nos écoles et pensionnats invitent le F. Séité pour des séances semblables et que celui-ci puisse répondre à leur appel. Bien des « complexes d'infériorité » si vivaces encore chez tant de Bretons, seraient détruits pour jamais. »

Euz Ploermel, Urz Frered Lamennais, e teuas ive al lizer-mañ da Zekretour ar Bleun-Brug :

« Cher Frère,

« Les Juvénistes finistériens vous remercient au nom de tous leurs confrères de votre captivante conférence agrémentée de si belles images qui nous ont tous très vivement intéressés. Nous attendons votre prochaine visite qui nous causera un réel plaisir.

« Nous serions heureux de recevoir des livres Bleun-Brug des années passées contenant des chants bretons notés. Cela nous permettrait d'avoir un vaste répertoire breton... »

Signé : Les 10 Juvénistes finistériens (10-2-59.)

Abaoz e droiad er Morbihan hag er « Côtes-du-Nord » eo bet an aotrou Seite e skol an danvez mestrezed libr, e Sant-Sebastian, Landerne, ha goude e Bég an Enez-Wenn (l'Ile-Blanche) e Lokron, el leh m'o-deus, ar Seurezed gwenn eur haer a Juvenat.

Amañ, ar studierezed, evid kloza an abaden, a ganas d'ar prezegeger « Bro goz ma Zadou » da ziskouez o harantez da gement a oa bet diskouezet ha lavaret dezo. Hag en deiz warlerc'h, e oa eun dudi o hlevet, e-doug an overenn o kana kantig ar gomunion « Mari gwir Vamm da Zoue ».

Prestig goude, sekretour ar B. B. a reseve al lizer-mañ digand unan euz ar gelennered.

« ... Cette semaine j'ai fait des heureuses en classes de 6^e, 5^e et 4^e, en apprenant la chanson : « Maro va labousig ». L'enthousiasme des enfants en découvrant paroles et notes au tableau était la preuve convaincante que vous aviez su les intéresser lors de votre passage à l'Ile-Blanche.

« Elles aiment aussi jouer au pipeau tous ces beaux thèmes du folklore breton, religieux ou autres. Je mets à profit l'élan et l'enthousiasme qui caractérisent leur âge, en leur proposant une nourriture de qualité, que je puise largement dans notre incomparable patrimoine breton.

« Les danses nous intéressent aussi. Mais je ne les connais pas beaucoup et en fait de livres, je ne sais s'il en est de satisfaisants... »

Sœur L. R. (7-2-59.)

Goude beza gwelet ar skolioù danvez-mistri ha mestrezed-skol, eo eet adarre or zekretour da welet ar skolioù all.

Evid lakaad war zao Bleun-Brugou-skol Ploueskad ha Lanniliz, e-neus gweladenet ar skolioù-mañ, paotred ha paotrezed : Kastell-Paol, Santec, Plougoum, Sibiril, Plouvorn, Landi, Bodiliz, Plougar, Sant-Derhent, Kleder, Ploueskad, Gwinevez, Lesneven, ar Folgoad, Plougerne, ar Grouaneg, Guisseny, Kernouez, Sant-Fregant, Plougerne, Landada, Lanniliz, Treglennou, Kerniliz, Lanarvily, Lokournan, Milizac, Kerzent, St-Tonan.

An Ao. Collean, kure Plouvien, e-neus gwelet skolioù Plouvien, ar Vourh-Wenn, Plabennec hag an Dregeg.

Gand ar Frer Herve, euz ar Groaz-Ruz, Brest, Visant Seite e-neus gweladenet skolioù Plouarzel, Ploumoguier, Lambaol, Porspoder, Landunvez, Porsall, Gwitalmeze, Plougin.

Ar Frer Herve e-noa gwelet a-raog skolioù Boharz, Gwiler, Plouzane, Lokmaria.

Abadennoù a zo bet roet e skolioù St-Yann-Vadezour hag an Ursulinezed e Kastell-Paol, e Plougoulm (p. ha m.), Sibiril (m.), Plougastell (m.), Landreger (p.), an Nivod Loperlec (p.), Plougastell-Daoulas (p. ha m.), Loperhed (m.), Dirinon (m.).

Elliant (p. ha m.), Coray (m.), Langolen (p. ha m.), Brieg (p. ha m.).

En eur skol euz goueled-Leon, ar rener-skol a roas da zeski d'e baotred pe ar « Yarig he viou aour » pe « La poule aux œufs d'or », dezo da zibab. An hanter a zibabas « Ar yarig he viou aour » goude beza lavaret ne ouient ket a vrezonég. Ar maout a yeas gand an displegerien vrezonég. Er zizun warlerh an oll a zibabas ar brezonég.

En eur barrez e-kichen e oe esee, e-kerz eun abadenn, rei eun dra bennag e brezonég er patronaj. An dra-mañ eo a blijas ar muia d'an dud.

E meur a skol e vez gortozet gand mall, gand ar vugale, levrioù ar henstrivadegou.

En Nivod, eo bet riñset, en eun taol, stal al levrioù brezonég, raktal goude ar brezegenn. Pep hini a 'felle dezañ prena e levr brezonég ; darn a brene meur a hini.

Kalz kemm a gaver a-wechoù etre diou skol ar menez parrez. Unan a lavaro deoh n'eus netra d'ober ; eo maro ar brezonég war vuzelloù ar vugale, e-keid ha ma lavaro deoh ebén ar hontrol. Unan ne wél nemed diesterioù, ebén, hini ebéd, pe nebeud. Ar vistri eo a zo da hounid, hentoh eged ar vugale.

Gouelioù ar Bleun-Brug.

Taolit evez mad : chenchet ez eus bet deiz da Vleun-Brug Plougastell.

Setu amañ penaoz eo bet renket an traou :

- Bleun-Brug Leon, e Plougastell, d'ar 14 a viz Even ;
- Bleun-Brug GWened, e Langonnet, d'an 21 a viz Even ;
- Bleun-Brug Kerne, e Elliant, d'ar 5 a viz Gouere.

Daou Vleun-Brug ar Skolioù a vo e Leon, da 'fin miz Mae, moarvad d'ar yaou, dra ma ne gaver sulvez libr ebéd.

Lakit ho pugale da gonkouri. Goulennit diganeom levrig ar honkourioù evid eun itimbr a 25 lur. — Ouspenn 3 000 on-eus gwerzet a-benn bramañ. An trede moulladur a zo deuet er-mañ.

Radio-Kimerc'h.

Ar vugale o-deus bet prizioù kenta e Bleun-Brug St-Thegonnec evid ar han hag an displega. a zo bet enrollet gand Radio-Kimerc'h. ha bet roet da glevet e-doug miz Meurzh ha miz Ebrel. Re all a vo c'hoaz enrollet diwezatah. Eun dra gaer, neketa, klevet bugale euz 6 da 13 vloaz o kana hag o displega brezonég. Ar vugale eo an amzer da zond.

Skignit en-dro deoh, ar baperenn a gavoh amañ da houlenn sinadurioù, evid ma vo ledannoh plas ar brezonég er radio.

Skol dre lizer.

Bep sizun e teu deom eur skoliad nevez bennag. Setu amañ pennadoù liziri dibabet e-touez ar bern on-eus bet :

« Bien qu'habitant la Haute-Bretagne, Guéméné-Penfao, je m'intéresse tout particulièrement à la langue bretonne. J'accomplis actuellement mon service militaire en Algérie et ayant du temps libre je désirerais vos cours par correspondance... »

Capor. J. A. (11-2-59).

« Je désire m'inscrire à votre cours de breton par correspondance... »

Françoise L. F. (étudiante) (Kemper, 20-2-59).

« Je vous serais très reconnaissante de me faire savoir si vous pouvez me faire parvenir les 2 séries de vos cours par correspondance. J'ai déjà fait un an de breton à l'E. N. et possède les ouvrages Seite-Stephan. »

M. M. (Paris, 12-2-59).

« Désireuse d'apprendre le breton, une personne m'a recommandé votre adresse me disant que vous deviez enseigner le breton... »

B. L., cultivatrice à C., Finist. (10-2-59).

« Sur la recommandation de Monsieur M., dont je fus l'élève l'an passé, je me décide à vous écrire... Il m'a fait savoir que vous donnez des cours de breton par correspondance. Pourriez-vous me fournir tous renseignements à ce sujet ?... »

G. M. (Vannes, 21-1-59).

Lennertien Bleun-Brug, bruduit en-dro deoh or skol dre lizer. Goulennit diganeom or papiroù diwar-bennit.

Prenit diganeom : (V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin, Fin. C.C.P. 544.22 Nantes).

Deskom brezonég, nouvelle méthode de breton, la plus moderne, la plus attrayante, illustrée, deux couleurs, gand Seite-Stephan. Priz : 700 lur (franco).

Lexique breton-franç. et franç.-breton (Seite-Stephan). Priz : 350 lur (franco).

Trohadou levenez.

Bep sizun, koulz lavaret, e kaver meneg er journalioù, euz « trohadou levenez » (coupes de la joie). Nebeud tre a vrezonég a gaver war ar rollou. Eur wechig bennag koulskoude, e weler eun draig bennag. E Langolen hag e Gwiseny, war on-eus klevet eo bet eet ar maout gand an hini a zistagas pe a ganas brezonég.

Gand ar plahed yaouank eo e vez ar muia fae, eveljust, o tibab brezonég. Gwelloh e kavont dansal eur « ballet-russe » pe kana eur ganaouenn « Tino Rossi » bennag. Ha koulskoude, nag a levenez a vo da falhad, heb mond pelloh eged harzou ar barrez. Eur plah yaouank a skriv deom :

« Dimanche dernier, à la séance théâtrale de Pl., avec une autre fille, j'ai donné « Katellig, Marijan ha Cheunig » qui, je vous assure, a déridé toute la salle. »

Kaer 'zo, a lavare din eur beleg, n'eus ket pell. ar brezonég eo, zoken pa lavaront beza en e eneb, eo a laka on tud da dridal ar muia.

An tri « Vleun-Brug-Skol » e-neus roet ar Bleun-Brug, warlene, o-deus diskouezet, e heller c'hoaz, ha gand brezonég hepkén, roet gand bugale, lakaad saliadoù tud da gaoud plijadur forz pegement.

Klevet on-eus ive, ez eus bet roet pezioù c'hoari brezonég, ha gand plahed yaouank, er Grouaneg, e Pouldergat hag e Leskonil. Setu aze tri l'eh dispartiet mad, ha dishañvel braz an eil diouz egile.

Diskou nevez.

Kanerien-Leon, euz Landivizio, a zo o nevez embann daou zisk nevez, euz ar re gaerra :

1°) Kantikou brezonég (Mouez Breiz, Kemper, 33 tours, microsillon, n° 3308). — War an disk-se e kaver : Ni ho salud gand karantez — Intron-Varia Penhorz — Evid beva gand levenez — Mamm da Jezuz — Anjeluz pask — Intron VaVria Rumengol — Kantig Sant Erwan — Kantig Sant Joseph.

2°) Pennadiu displeget, e galleg, diwarbenn Breiz, tennet euz Tristan Corbières, war donioù kantikou brezonég. Ar pennadoù diwarbenn « Pardon Santez Anna 'r Palud » gand kantikou ar pardon, a zo kaer dispar (33 tours, microsillon). — Goulenn an diskou-se digand an Ao. Abjean, kure Landivizio.

Embannadurioù.

Ar Furcher *Loetiz Lok*, e-neus nevez embannet eur haierad roneoskrivet war oberou brezonég an Tad Julian Maner, nevez lakeet gand On Tad Santel, war roll an dud eñruz. Eul labour don ha talvouduz braz eo ar haierad-se. Kavet e vez ennañ : 1°) Les Œuvres en langue bretonne du R. P. J. Maunoir, S.J., 1606-1683. — 2°) Cantiquou spirituel (1642) en moyen breton, avec indication des airs — recueil unique — par un Père Jésuite anonyme. — Le Père Maunoir en est-il l'auteur ? — 3°) Recueil manuscrit de prières et cantiques bretons par M. du Botmeur (environ 1700). — Peut-on le qualifier de Heures originales et authentiques du Père Maunoir ? 4°) Le Père Maunoir a-t-il eu des collaborateurs ? — 5°) Le Père Maunoir grammairien, lexicographe, écrivain. — 5°) La langue bretonne au 17^e siècle. — Eur studiadenñ eo hag a zo he 'flas e peb levraoueg. He goulenn digand : Dr Dujardin, St-Renan.

Kizier noz Sant Pabu.

« Goude Gurvan ar Marheg estranjour » eo deut er-mêz, e stumm eur haier brao, oberenn Biel Eliez, bet loreet warlene gand Emgleo Breiz. Eun oberenn farsuz eo er saourusa brezonég bet skrivet biskoaz. E skridoù evel-se, eo e kavo ar skrivaniereñ da zond gwir eienenn ar brezonég beo.

Goulenn al leorig digand « Emgleo Breiz, B. P. 17 Brest ».

TENZOR AR BREZONEG BEO

C

1. Chad.

« Ober chad. » C'hwita war an taol. (Kleder). « Deuet oh a-benn da ober dezañ cheñch soñj ! — Ya, moarvad ! chad adarre ! » (Chad am eus greet adarre, n'on ket deuet a-benn.)

Daou hér all o-deus eur ster demheñvel : *Boud ha Kazeg.*

Boud, boudal on-eus gwelet dija.

Pa vezer o c'hoari ar hilloù, pa ne biler kilhenn ebed, e vez lavaret : *ober kazeg* hag al lavarenn-ze a dalvez ive evid : c'hwita war dra pe dra. « Teir gwech on bet dija o klask prena an ebeul en ti all ; *kazeg beb taol !* »

2. Chadenn.

« Eur jadenn eo... eur jadenn zen, eur jadenn vuouez. » (Eun den kordet, eun den hag a gav atao tro d'en em denna.)

3. Chala.

Gonideg : chagriner, agacer, impatienter.

1) E Gorre-Leon e-neus eur ster disheñvel. « N'on ket chal — pe n'emaon ket e chal — da vond d'ar friko — n'on ket chalet da vond d'ar friko. » (N'am eus c'hoant ebed da vond, gwelloc'h e kavan ehom er gêr.)

Kerneviz a lavarfe « N'houlon ket mond ».

Ne vez implijet nemed el lavarennou-nah. Awechou koulskoude dre 'fent hag evid c'hoari gand ar gériou e vez implijet a hent all. « Marteze n'out ket chal da vond ? — Chal awalh ! »

2) Chom a blas. « Chom a ra an dour da jala er houer » (pa ve red dezañ redeg). Gorre-Leon : « Chom a ra e voued da jala ennañ ». (Gwelet « chaña »).

[F.F. (1) Orin. Chal-a a deu euz ar galleg koz chal-oir, ha dreizañ euz al latin calere, « être chaud ». A-chal-ander ha non-chal-ance o deus ar menez orin. Kenveria « arabad deoh en em jala » hag ar galleg koz « peu vou chaut que... »]

4. Champalad.

Dond ha mond a-blas. (Kleder).

Eur viorh a zo klañv, mond ha dond a ra en he speurenn, *champalad a ra*. Eur marh e-neus sachet diou pe deir gwech war e garrad heb gelloud diblas ; bremañ e teu hag ez a : « ne zacho ket mui, ne ra nemed *champalad !* »

Tud o hortoz, en o zav, o poueza tro ha tro war eun troad ha war unan all. « Emañt aze o *champalad*, eun eur 'zo. » — Da geñveria gand *Champal-pigellad* implijet e Plouarzel evid friantellad hervez Mab Arzel 1942. Er Vourh-Wenn hag en Ospital-Kamfroud : *champal*.

5. Chana.

E Gorre-Leon « *chana* » diwar-benn eul loen-kezeg a zo ehomet a-zav gand e garrad heb gelloud mond ken war araog. « Chanet eo ar gazeg ganin er straed-son. »

E Skaer e vez lavaret : « *Lohet ar gazeg* ».

6. Chaoch.

Souche e galleg (Plouarzel, Mab Arzel 1952). E Gorre-Leon e vez implijet ive hag e Skaer « *koad chaosou dero koz a gasin dit ma kares* ».

[F.F. er Vourh-Wenn, choch, chochou : dijocha ar haou.] —

7. Chaodell.

« *Soubenn ar jaodell* » (Plouvorn) soubenn an ognon.

Ernauld e-neus *jaodel* : (soupe) à l'oignon, etc.

(1) F.F. = F. Falc'hun.

E Kleder eur rimadell :

« *Soubenn ar piz, soubenn ar fav,*

« *Soubenn ar jaodell ar gwella.* »

8. Charguli.

Er vro vigoudenn : monter en graine. *Sabardi* e St-Nic. (J.-L. Peron, 1943). [F.F. er Vourh-Wenn : chaotri ; saladenn chaotret.]

9. Charread.

1. *N'eo ket awalh karga, goude eo red charread*, a vez lavaret d'an neb e-neus evet re hag e-neus poan o vale eeun.

2. « *Charro* » e Skaer. « *Euz ar Merdi d'ar Haro* » — « *Eun devez charro.* » 18 kard leo etre diou gêr euz ar barrez.

10. Chati.

Poan, trekaz. (Kleder.) « *Chati am eus gantañ* » — « *Chati a ra va mab d'in.* » « *Chatiet on gand va gar 'fall.* »

E Skaer e vez lavaret : « *deur* » : « *Deur am eus o klask kas va 'fôtr d'ar skol.* »

[F.F. Chati, tennet euz chatiet, galleg châtîé, dre heñvedigez ouz melkoniet, etc... ?]

11. Chélenn.

Eur wazenn er mên. (Kleder) liezder : *chel*. « *Chél a zo gand ar roh.* » — « *Aze ez eus chél.* » — « *Fall eo mond d'eur roh eneb ar chél.* » — « *Eur jélenn velenn, eur jélenn vil, a zo er roh.* »

12. Chelgenn.

« *Dilhad chelgenn a zo gantañ.* » Doare dilhad douget e bro Landi, Sant-Tegonneg, Gwiklan.

Koef Landi eo ar *sparlenn* pe ar *hoef-sparl*.

Koef Bro-Gastell eo ar *jikolodenn*. Bro Pont 'n Abad ar *vigoudenn*. Bro-Gemper, ar *vorledenn* pe *penn-päper* ; ar Poher : *madenn* pe *koef plad*. — Bro ar Pont ar *gapenn*. Ar perzier-mor (Douarnenez, etc.), ar *Penn-sardin*.

[F.F. An anioù a zo bet roet d'ar gwiskamanchou, nann gand ar re o douge, med gand o amezeien, hag aliez dre hoaperez.]

13. Chemed.

Spered. « *N'e-neus tamm chemed ebed ar paour-kêz* » (Kleder).

14. Cheñch.

a) E Leon (Gorre ha Goueled) cheñch = treutaad.

« Echu eo e amzer zoudard gantañ, *cheñchet e kavan anezañ* ».

E leh all e vez lavaret *kastizet*. E Skaer e vefe lavaret *gwaseet*.

b) E Skaer *cheñch* a dalv evid koll ar spered.

« *Me 'gav eo eun tammig cheñchet abaoe maro e wreg.* »

15. Cheo. gg.

1) « *Attelage* » (Gorre-Leon) : « *Eur jeo a dri loen* ».

2) Diwar an dra-ze eo deuet ar gêr « *jeo* » (marteze « *jao* ») da dalvezoud evit ar zikour a vezer da labourad.

« Pemp devezour a zo deuet davedom, *hirio e vezim cheo vad* » (sikour vad).

3) A-*jeo*, asamblez. Pa vezer daou pe dri o sacha war al liemmen : « *Alo, paotred, a-jeo !* » D'ar hezeg ive d'o lakaad da jacha asamblez.

[F.F. E Goueled-Leon : chao.

Euz ar galleg chevaux, bet distaget eh(e)vao. E Bro-Wened, jao (eur gazeg), a deu euz cheval, bet distaget j(e)vao e Breiz-Uhel.]

V. F.

DISTRO AR PRIZONIER



Ar gwella den a oa o chom e-barz ar vro,
D'ar brezel 'rankas mond, kerkent ma oa e dro.
D'e wreg e pokas stard pa oe ouz he huitaad,
A-barz kerzet d'ar beh, leh ma rede ar gwad.

— Na leñvit ket gwreg paour, sur om da gaoud an treh,
Ha buan 'teuin d'ar gêr, arabad deoh kaoud neh ;
War-dro an tiegez-mañ evid ar gwella 'reoh ;
Med en em skuiza re arabad e vo deoh.

D'ar brezel eo êt kuit, an ozah-se ken mad ;
E bried, doaniet oll en em jal kalz, avad.
Abaoe meur a viz ne zeu lizer ebed.
Digand ar zoudard kêz. Ha lazet 'vefe bet ?

Eun devez, pebez reuz ! e teuas 'n aotrou Mêr,
Da zigas d'ar wreg paour, he-unan 'barz ar gêr,
Mortuaj he gwaz mad, diskaret 'kreiz e vrud,
Gand eun tenn en e dal 'n eun emgann têt ha yud.

Piou 'hellfe, va zud vad, lavared sklêr ha frêz
Ar glahar don ha kriz he devoe 'r vaouez kêz :
Den n'he frealzje mui, sur hag hep mar ebed,
Rak koulz den hag he gwaz er bed-mañ ne oa ket.

An amzer 'ya e-biou, koulskoude, beb eun tamm,
Ha d'an intanvez paour e skanva he gwall zamm.
'N intanvez a zo koant, ha madou 'deus ouspenn :
D'eur galon yaouank c'hoaz, chom he-unan 'zo tenn.

Ar servich deiz-ha-ha-bloaz 'zo kanet, eiz deiz 'zo,
Hag ar baz-valan koz e-neus grêt mad e dro ;
Digemer vad 'n-eus bet digan 'n intanvez vrao :
— « Asinom 'n eured 'ta, rag gortoz n'eo ket brao. »

An daou zen nevez-mañ, en o zi euruz braz,
A labour hag a boagn, koulz ar wreg hag ar gwaz,
Da gas o stal en-dro, ha da zevel ervad,
Ar bugel o-deus bet, da laouenaad o stad.

Eun devez, euz an hañv, tost d'he zi war eur skaoñ,
Ganti he mabig koant, er vamm e krogas aon.
Dirazi 'oa eun den, koz ha loued e vleio,
Eur zoudard gwisket fall, grêt gantañ meur a leo.

« Digouezet oun en-dro, d'ho kavoud, va gwreg kêr.
Prizonier oun bet pell, heb kelou euz ar gêr.
Med ar hrouadur-mañ, ken koantig he ken teo,
N'hen anavezan ket, ne ouzoun ket piou eo ».

— Va Doue 'me ar wreg, strafuilhet gand ar spont,
Truezuz eo va stad, ha trist ganin ar gont.
Intañvez ez oun bet, ha bremañ siwaz din !
Oun pried da zaou waz ! Va Doue, petra 'rin ? »

Horjellet e-neus an den, war e ziu har, o-diou,
Ha krohen rust e fas, dioustu 'neus cheñchet liou ;
Met klemm ebed n'eus deuet euz e vuzellou yen :
Pardoni a ran deoh. Me 'zo eur paour kêz den !

Kerkent ar zoudard paour 'zo êt war an hent braz,
'Neur ruza e dreid skuiz, gantañ e damm penn-baz.
Lavaret e-neus c'hoaz : « Gwreg, kenavo er bed all.
Chañs deoh da veva pell, e-ser ho pried all ».

Yeun ar Gôw.

Skol Sant-Dren e Plougastell-Daoulaz

Sant-Dren pe Sant-Adrian, a zo eur geriadenn vraz euz parrez Plougastell, eul leo bennag diouz ar bourg.

War-dro ar bloaz 1850, tad-koz an aotrou Ropars rener komite Bleun-Brug Plougastell, a oa eno rener war skol ar baotred ha kaner en iliz parrez. Ne 'fellas dezañ morse kuitaad al leh-se. Doujet ha karet gand an oll, ne veze greet anezañ nemed « Ar Skolaer koz ».

Mamm an aotrou Ropars ha diou hoar dezi a zigoras, er memez leh, eur skol evid ar merhed bihan.

O gweled a reer amañ en tu all, gand o bugale, war ar skeudenn : eur skeudenn gaer neketa !

Eun devez, an Inspektor a rebechas dezi ober implij euz ar brezo-neg da zeski galleg d'he bugale.

O klevet kemend all, ar « skolaer koz » a skoaz eun taol dorn kalet war an daol, méd ne rannas grik.

E verh avad a respontas :

— « Ne ran kén, emezi, nemed heulia ar pezh a ra va zad. »

— « Réd e vo deoh dilezel ar hiz-se », eme an Ensellour.

— « Aotrou, emezi, n'eo ket fall ar pezh a ran. N'eus skol all ebed o kaoud kement a ziplotou er hanton. »

— « Neuze, eme an Ensellour, n'ho-peus nemed kendelher. »





SKOL SANT-DRËN, E PLOUGASTELL, WAR-DRO AR BLOAS 1900

Pet merhig, gwisket evel ar re-mañ, a vo gwelet e Plougastell, d'ar 14^a viz Even, deiz ar Bleun-Brug?
Pet euz ar re-mañ a yefe c'hoaz beo?